

KANTIK SANT LAURANS

Var don : *Ar voyen d'en em assuri.*

DISKAN :

*Sant Laurans, merzer gallouduz,
Evidomp pedit bemde,
Ma vezimp tud a feiz nerzuz,
Guir vignoned da Zoue.*

Sant Laurans ar merzer brudet
Hen doa kerent vertuzuz,
Hag abred dezhan oue desket
Anaout ha karet Jezuz.

'Vit an tadou hag ar mammou,
Sant Laurans, pedit Doue,
Ma c'hellint varzu an envou
Hench a mad ho bugale.

A Vro-Spagn ez oa ginidik,
Mes eno ne oue ket pell.
Ar Zant a ieas yaouankik
Bete Rom, ar gær zantel.

E kær Rom, brud he barfeted
En em skign e berr amzer ;
Eno gant ar Pab eo choazet
Ha grëat Avieler.

Pa ia, dre urz Valerien,
D'ar maro ar Pab santel,
Evelldhan hag en he gichen
Sant Laurans 'garfe mervel.

« C'houi am heuillo 'benn tri devez, »
Eme Sixt d'he vab karet.
'Benn tri devez, e guirionez,
Sant Laurans oue merzeriet.

Dispennet eo he izili
Dre zaouarn ar vourrevien ;
He gorf n'eo nemet eur gouli
Euz an treid beteg ar penn.

Var eur c'hrill astennet goude,
Dindannhan oue c'houezet tan,
Mes, kennerzet gant grass Doue,
Sant Laurans ne reas van.

Deskomp, o velet Sant Laurans
Ken gouzanvuz 'n he boaniou,
Deskomp kaout kourach ha fianz
En eur zougen hor c'hroasiou.

Ar Zant, goude poaniou skrijuz,
A varv hag a zav d'an Ee.
Noz-deiz eno dirag Jezuz
E ped 'vit he vugale.

Deuz ar gwent, an drouk izili
Sant Laurans a ve pedet.
Neb a zeu devot d'he bedi
A ve ganthan selaouet.

Diouz peb drouk plijet hon diouall,
O Sant Laurans beniget ;
Diouz ar pec'hed ispisial
Ra vezimp ato miret.

Hor zikourit, dre ho peden,
Da vale var ho roudou,
'Vit ma hellimp en ho kichen
Pignat eun deiz d'an envou.

KANTIK SANT HERBOT

DISKAN :

O Sant Herbot, ken karet
En hor bro Breiz Izel,
Davedoc'h omp diredet
Da c'houlen ho skoazel.
Goulennit bennoz Doue
Deomp holl ha d'hon tier,
Ha bennoz Doue ive
D'al lóned, d'ar c'hreier.

Euz Bro-Zôz oa ginidik
An Autrou Sant Herbot ;
He gerent, tud pinvidik,
Oa ive tud devot.
Dre ho c'henteliou santel
Ha skoueriou ho buez,
E lakejont ho bugel
Var hent ar zantelez.

Ar Zant, en he yaouankiz,
A jomas pur bepred ;
Ne ziskoueze 'met dispriz
'Vit follentez ar bed.
O na kaera vertuziou
Dirazomp a vleunio,
Pa vo heuillet he skoueriou
Gant tud yaouank hor bro !

Sklerijennet gant Doue
Ha nerzet gant he c'hrass,
Sant Herbot zeu heb dale
En tu-ma d'ar mor braz.
'Vit brassa mad hon tadou
E teu var zouar Breiz ;
He gomzou, he vurzudou
A gresk enno ar feiz.

Var don : *Breueriez ar Feiz.*

Demdost d'ar mor e vevas
Eur pennadik amzer,
Mes he vrud en em skignas,
Hag hen da jench karter.
Mont ra da guzet neuze
E goueled eur c'hoat braz.
Bez' eo eno, heb dale,
Brudetoc'h 'vit biskoaz.

Tud klanv a zeu d'he lochen
Hag a zistro pare ;
Tud goasket gant an anken
A gav peoc'h an ene.
Mar deo mestr var bep klenved,
N'eo ket varnho hebken ;
Outhan e sent al lóned,
Al lóned goue zoken.

Gant Doue holl-c'hallouduz
D'ar Zant eo bet miret
He c'halloud ken burzuduz
Var an anevaled.
Setu perag e peder
Sant Herbot beniget,
Evit pellât peb danjer,
Peb drouk diouz al lóned.

Pa glev ar Zant goulennou
Græt evit lóned mud,
Guelloc'h e klev pedennou
Græt dezhan 'vit an dud.
Sant karet, hon diouallit
Dreist holl diouz ar pec'hed
Ha dre an dorn hor c'hassit
Da vro an eurusted.